

D'an 2 eil a viz Du

- Kounidigezh an holl feizidi aet d'an Anaon. Erbediñ a ra an Iliz en deiz-mañ evit hec'h holl izili o c'houzañv ur c'hlanidigezh diwezhañ a-raok antren er c'hloar. Sant Odilon a lakaas an eñvoradur-mañ da dalvezout evit holl vanatioù Cluny.
- War-dro 315, en Armenia, merzherenti ar sent Karterios, Styriag, Tobi, Eudoks, Agapios hag o c'humpagnuned soudarded. Dre ma chomjont start en o feiz e voent dêvet ez vev.
- E 1521, ar wenvidigez Marc'harid a Lorren, intañvez, leanez, kenvamm ar roue Henry IV a Vro-C'Hall. Deuet da vezañ intañvez e teuas da vezañ leanez en Abati Mortagne e Normandia he doa lakaet da sevel.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Maeg pe Meog, penitiour e Breizh, diskibl sant Meven, a savas e beniti e Koadmeog en eskobiezh Dol ha roet e anv da barrez Plumiog e bro-Benterv, nepell eus Loudiog. Kehelet e vez e meur a lec'h.
- Er Vvet kantved, sant Erc'h, eskob en Iwerzhon, breur sant Euni, sant Herec'h ha santez Yae, badezet gant sant Padrig.
- E 680, sant Bolc'han, Iwerzhonad, aet da vanac'h e Lens e Bro-C'Hall.
- Er VIIvet kantved, sant Vulgan, genidik a Vro-Saoz e voe penitiour e Bro Artez. Hervez lod en dije kuitaet Kêrgent lec'h ma klasked e lakaat da eskob. Dilestrañ a reas e-kichen Wissant hag e avielas tro-dro da vBoulogne ha da dThérouanne. Goude-se e voe penitiour e-kichen abati Sant-Vaast en Arras. Reiñ a reas skoazell da sant Madelgisil, penitiour iwerzhonat. Goude e varv e voe kaset e gorf da Lens en Artez lec'h ma vez kehelet evel paeron ar gêr.
- En Iwerzhon, sant Ainmire, manac'h.
- En Iwerzhon, santez Kuñvez (Iw. Coimhe), maouez santel.
- En Xvet kantved, santez Bai (Gl. Baye), abadez e Bro Skos, ha santez Maor (GL. Maure) a voe abadez war he lerc'h.
- E 1148, e Claravellis e Burgondia, sant Malac'hi Ard Macha, abad hag arc'heskob Ard Macha, mignon sant Bernez. Ganet war-dro 1095 en Ard Macha ez eas da vanac'h hag e adsavas abati Bangor a oa bet diskaret gant ar Vikinged. Bez' en devoe da c'houzañv a-berzh brientinion a glaskas zoken e lazhañ. E 1139 ez eas da Roma evit goulenn ouzh ar pab bezañ diskarget hag echuiñ e vuhez e-kichen e vignon sant Bernez. Hogen e voe anvet legad hag distro da Iwerzhon e adreizhas Iliz an enezenn. E 1148 e kemeras en-dro hent Roma hag e tremenas dre gClaravellis lec'h ma kouezhas klañv ha ma varvas etre divrec'h sant Bernez.

D'an 3 a viz Du

- War-dro 592, santez Silvia, intañvez kensakret, mamm ar pab Gregor Veur. Roet a-grenn d'ar bedenn ha d'ar binijenn e plede gant he mab hag e oa evezhiek d'e vegañ a-zoare evit ma vefe yac'h.
- E 1639, e Lima er Perou, sant Varzhin Porrez, lean dominigat. Diskouez a reas un emzinac'h skouerius en e garg a glañvdiour hag e voe ur burzhudour bras o lakaat e zonezonoù en arempred ar reuzeudion.
- E Breizh, war-dro- 560, sant Gwenhael, eil abad Landevenneg. Hag eñ mab Revael ha santez Levenez e voe diskibl ha lerc'hiader sant Gwennole.
- Er VIvet kantved, santez Levenez pe Lavena, mamm sant Gwenhael.
- Sant Eleri, abad e Kembre.
- E 1148, sant Maelvezeg (Iw. Maolmhaodhog ; latinekaet : Malachia), arc'heskob Ard Macha, adreizher an iliz en Iwerzhon. Mab ur c'helenner ha ganet en Ard Macha e oa breur sant GiollaChriost. Diskibl e voe d'ur penitiour e anv Imer ha Cellach eskob Ard Macha ; skoliad e Lios Mór (Lezveur), abad Bangor, eskob Conchur ; e zilez a roas e 1137 ; marvet e Claravellis e-kichen sant Bernez a skrivas e vuhez.

D'ar 4 a viz Du

- E 304, e Bologna, merzherenti ar sent Vital hag Agricola. Hervez danevell sant Ambroaz e oa Vital sklavour Agricola hag e voent keneiled er verzherenti. Vital a varvas p'edod ouzh e vourreviañ dirak Agricola na blegas ket hag a voe kroazstaget. Sant Ambroaz a serras o relegoù hag a lidas dedi un iliz dindan o faeroniezh e Firenze. E Ravenna e weler c'hoazh ur vrientiliz bet gouestlet dezho e 525, kinklet gant marelladurioù meurdeus.
- E 1031 e Pannonia, distro da Zoue sant Emerig, tad a diegezh. Mab sant Stefan, roue, Hungaria ha santez Jisela, e varvas kent bezañ roue goude ur vuhez santel ha skouerius.
- E 1584, sant Charlez Borromeo, kardinal, eskob Milano, Patrom ar gloareged. Anvet e voe arc'heskob Milano gant e eontr ar pab Pie IV hag en em ziskouezas evel ur gwir bastor evezhiek ouzh ezhommoù Iliz e amzer. Strivañ a reas da lakaat e pleustr disentezioù goursenez Trento. Diazezañ ar reas kloerdioù evit stummañ an danvez beleion. Aketus e voe da weladenniñ e eskobiezh hag ar re stag outi. Paeron ar gloareged.
- Er Vvet kantved, e Kolun, merzherenti sant Yuzad pe Juvad, beleg, koñfesour santez Ursula. Roet eo bet e anv da barrez Sant-Juvad e-kichen Evran, er Poudouvr (eskobiezh Sant-Maloù).
- E Breizh, e 1485, ar Wenvidigez Frañseza Amboaz, dugez Breizh, intañvez, gwreg Pêr II Breizh. Sevel a reas e Gwened Karmez ar Bodon dindan warez an Teir Mari lec'h ma'z eas da leanez ha ma voe prioled ar-raok mont da Garmez ar C'hoadoù e-kichen Naoned.
- D'an hevelep deiz, e 1667, e Sant-Gwen e-kichen Mur, ar bac'hiadez Katell Danielou. Matezh ha kevrinorez a zo bet graet anezhi ene ar misionoù gant an Tad Juluan Maner a voe test eus he buhez kevrinel dibar.

D'ar 5 a viz Du

- Gouel ar Relegoù Santel. Evel ma oa un nerzh dreist naturel o tont eus Dended Santel Jezuz hag o tegas ar pare d'ar re a dostae outañ, e c'hell ar sent, hag int perzhiek hiviziken e klod Doue en neñvoù, seveniñ burzhudoù (kv. Kempedenn Oferenn ar relegoù santel) dre o relegoù chomet war o lerc'h (eskern, ludu, ha zoken pezhioù dilhad pe binvioù diseurt bet en o arver, levr, kammell h.a.) ha neuze skarzhañ an diaouled, degas ar gweled d'ar re zall, glanaat al lovridi, pellaat an temptadurioù ha degas dimp ar madoù eus an dibab o tont eus Tad ar sklêrijennoù.
- E 307, e Kaezarea e Palestina, merzherenti sant Domnin. Mezeg yaouank e oa pa darzhas heskinadeg Diocletianus. Kondaonet da labourioù ret e mengleuzioù Pheno e tiwaskas amprouennoù kriz ha dre ma talc'he start d'e feiz e voe dêvet ez vev war urzh ar pefed Urban. War un dro gantañ e kounaer ar sent Teotimus, Philotheus, ha Timozeoz a voe lazhet er sirk da ziduell evit ar bobl, ha sant Auxencius, ur c'hozhiad a voe roet d'al loened gouez.
- War-dro 705, ganedigezh en neñvoù santez Bertilla, abadez. Da gentañ manac'hez e Jouarre war ribl ar Marne e Bro-C'Hall e voe abadez gentañ Chelles nepell diouzh Melda.
- Er IVre kantved, merzherenti sant Gwinforzh (Lt. Winifortus, Gl. Gènefort pe Guinefort). Genidik eus Bro-Iwerzhon pe eus Bro-Skos e voe merzheriet e Milano hag e varvas e Pavia lec'h ma voe kemeret da batrom Kevrenn Skol-Veur ar Gwir e 1415. Kehelet e vez en iliz Sant-Marzhin Lambal, Treveneg e Bro-Oueloù, e Treveron nepell diouzh Dinan, e Roz-an-Arvor hag e Sant-Brewalaer e Bro-Geunioù-Dol.
- E Breizh, er Vvet kantved, sant Kae pe Tegae, lesanvet « Kollezog » (karedig). Mab Ludun ha Tagu e oa penitiour e Kleder, mont a reas war-lerc'h da Gernev-Veur el lec'h a zo diwar e anv Lankey.
- Er Vvet kantved, sant Fili, manac'h, keneil sant Kae, kelennet en Avallon ha sant Kerrien pe Kerian, diskibl sant Kae e Kleder e Bro-Leon.
- Er VIvet kantved, sant Gwezhenneg (Gwezhennog, Tewezhenneg pe Venneg), abad. Mab sant Fragan ha santez Gwenn, breur sant Jagu ha sant Gwennole, e voe diskibl sant Budog en euz Lavred. Sevel a reas manati Landoag, bremañ Sant-Yagu-an-Enez, gant e vreur sant Jagu.

D'ar 6 a viz Du

- Er VIvet kantved, ganedigezh en neñvoù sant Leonarzh, diskibl sant Remi e Bro-Augustoritum hiziv Lemojez, beziat en abati Noblat hag hi war hent Kompostella. Patrom ar vac'hidi ez eo. E zeolieg en em ledas goude dieubidigezh vurzhudus Bohemond Taranto da-geñver ar Groaziadeg gentañ.
- E 1312, santez Kristina a Stommeln, gwerc'hez. D'he 13 bloaz e kuitas he c'hêriadenn evit mont da leanez e Kolun en Alamagn. Degemeret gant ar beginezed e lodennas diwaskoù hor Salver betek dougen kleizennoù an Diouzañv en he c'horf hag e voe trec'h da holl demptadurioù ar bed. Miret eo bet he c'henskriverezh prizius gant an dominigad svedat Petrus de Dacia.
- 498 merzher Bro-Spagn lakaet d'ar marv etre 1934 ha 1936 en o zouez eskibion, beleion, leaned, leanezed ha liked.
- E Breizh, er Vvet kantved, sant Eflamm ha santez Enora e bried, hag eñ mab ur roue eus Iwerzhon, dimezet da verc'h ur roue eus Bro-Gembre. Dedennet kentoc'h gant ar vuhez vanac'h en em dennas da Vreizh lec'h ma teuas Enora ivez evit bezañ penitiourez en e gichen e Plistin e Bro-Dreger. Echuiñ a reas hi he buhez e manati santez Ninnog e Lannenneg.
- War-dro 530, sant Maelan pe Melani (Lt. Melanius), eskob Roazhon. Ganet e Plazh, hiziv Braen e-kichen Redon, e varvas eno er manati diazezet gentañ. E vadelezh hag e vrokusted a dalvezas dezhañ bezañ anvet "Tad an holl reuzeudion" gant ar pab sant Gregor Veur.
- E 717, sant Gwinnog (Lt. Winnocius), 627-717, abad, breur ar roue sant Judikael, diskibl sant Bertin, diazezeur abati Wormhoudt e-kichen Dukark.
- E 577, merzherenti sant Eldad pe Aldad, eskob Caerloyw (Gloucester) e Bro-Saoz, lazhet gant ar Saozon oc'h aloubiñ ar vro. Bez' e voe da gentañ diskibl sant Ildud.
- En Iwerzhon, santez Fradhbar, maouez santel.
- Gouel holl sent Iwerzhon, savet gant ar Pab Benead XV.

D'ar 7 a viz Du

- Er Iañ kantved, sant Restitud, eskob Augusta Tricastinorum pe Sant-Paol-an-Tri-C'hastel. Hervez an hengoun e vefe an den ganet dall eus an Aviel deuet eus Palestina gant santez Mari-Madalen, sant Lazar hag an diskibled all.
- Er IVre kantved, e Ankara da vare heskinadeg Juluan an Dianzavour, merzherenti santez Karina, sant Melasipe he gwaz, ha sant Anton o mab. Mac'hagnet e voent ha staget ouzh ar bouilhouer dirak o mab a zalc'has d'ar feiz daoust da arvest jahinerezh e dud hag a voe dibennet d'e dro.
- E 739, ganedigezh en neñvoù sant Wilibrord, eskob, abostolour an Izelvroioù. Genidik eus Breizh-Veur e voe urzhiet eskob Utrecht gant ar pab sant Serj I añ hag e embannas an Aviel er Friz hag en Dania lec'h ma tiazegas eskoptioù ha manatioù. Brevet gant e labourioù hag aet kabac'h e varvas en ur manati en doa savet el Luksemburg.
- Er VIvet kantved, sant Ildud pe well Eldud, abad, mab Bic'han ha Rianwlez, diskibl sant Kadog, diazezeur Llanildud e Bro-Gembre, mestr speredel ar sent Samzun, Gweltaz, Paol Aorelian, Devi, h.a..
- Sant Sadorn, breur sant Ildud, ha keneiled sant Ildud: sant Gwenno, abad, Llanwynno e Bro-Gembre, sant Tevodeg, manac'h e Kembre, sant Izan, abad e kreizteiz Bro-Gembre, sant Atoel, abad e kreizteiz Bro-Gembre, sant Kov.
- Er VIvet kantved, sant Melion, manac'h kembreat, keneil sant Samzun.
- Er VIvet kantved, sant Kongar, abad. Ganet en Devon e oa ur C'Hembread anezhañ. Diazezañ a reas meur a abati. Roet en deus e anv da gCongresbury lec'h ma voe beziat ha da barrez « Saint-Congard » nepell eus Maelestreg (Malestroit).
- En Xvet kantved, sant Brelived pe Blinlived, eskob Gwened. Da gentañ manac'h e Kemperle en em dennas e manati Sant-Juluan e Teurng.
- E 693, sant Florent, Iwerzhonad, abad Huslach, eskob Strasbourg.

D'an 8 a viz Du

- E 306, en Albano, merzherenti ar *Pevar Sant Kurunnet*, ar sent Karpofor, Secundus, Severinus ha Victorinus, skourjezet betek ar marv war urzh Diocletianus.
- E 308, e-kichen Sirmium e Panonia, merzherenti ar Sent Kizellerion, Claudius, Castorius, Nicostratus, Simplicius ha Simpronianus, merzheriet. Nac'hañ a rejont pourvezañ un delwenn eus an doue Eskulap d'an impalaer. Roget e voent gant begoù houarn ha bac'het boestoù plom taolet Danav. Kehelet e vezont e Roma war ar Caelius e Brientiliz ar Pevar Kurunnet.
- War-dro 396, distro da Zoue sant Kler, beleg. Keneil da sant Varzhin e voe karget gantañ d'ober war-dro nevezadelezh Marmoutier hag eno e reas kalz burzhudoù.
- E 618, e Roma, sant Adeodatus pe Deusdedit Iañ, pab. Diuzet e 615, e oa beleg abaoe daou ugent bloaz. Gourlakaat a reas an oferenn bemdeziek da gloer Roma. Dre ur pok e pareas un den lovr.
- E 789, sant Willehad, eskob kentañ Bremen. Genidik eus Bro-Saoz, e voe kaset gant sant Bonifacius abostol Germania da avielañ ar Friz hag ar Saks etre ar Weser hag an Elb. Mignon Alcuin e oa.
- E 1115, sant Jeffrez (Gl. Geoffroy pe Godefroy), abad hag eskob e Bro-C'hall. Edo e vanati a Nogent-sous-Coucy nepell diouzh Laon o serinañ pa voe diuzet da abad ha diwar neuze e teuas da vezañ bleunius-kenañ. Anvet eskob Amiens en devoe kalz da c'houzañv digant ar vrientinion hag ar gloer hag e varvas e abati Sant-Krepin Soissons.- Eizhteiz goude Gouel an Hollsent e lider Gouel Holl Sent Breizh, ar sent diniver o deus steredennet istor ar vro. Gouzout a reer ez eus bet kristenion e-touez ar Vretoned ken abred ha penn-kentañ ar marevezh kristen. Adalek ar pempvet ha c'hwec'h-vet kantved e teuas en Arvorig ur rummad sent a ziazezas ur vroad nevez ha badezet adal he deroù e feiz an Ebestel.
- E Breizh, e 555, merzherenti sant Tremeur (Lt. Trechmorus). Mab santez Trefina, lazhet gant e dad Konomor ; emañ e vez e bered parrez Sant-Trifin e Kernev.
- E 555, sant Kebi (Kb. Gybi ; Lt. Cepius pe Kebius ; Sz. Cuby), abad hag eskob, lesanvet « Felyn » a dalvez « ar Rouz ». Hervez lod e vefe ganet e 485 e Kernev-Veur, hag eñ mab sant Selev, pe Selavan, ha santez Gwenn ha neuze breur sant Kadvan. Hervez lod-all avat e vefe ganet e 410 eus ar roue Salaün Iañ, dimezet gant merc'h ar Patrikian Flavius. Kentoc'h e vefe mab o merc'h Rianwlez ha neuze breur ar sent Ildud ha Sadorn, pezh a glotfe gwelloc'h dre m'eo bet merzheriet Salaün e 435. Kebi a resevas un deskadurezh a-zoare. D'e seizh bloaz war'n ugent ez eas da birc'hirinañ da Roma ha da Jeruzalem hag e voe beleget. Eskobet e vije bet gant sant Hiler Arles. Goude bezañ nac'het ar gador-veur goude marv e dad e krogas da veajiñ e Keltia o tiazezañ ilizoù ha manatioù e Kernev-Veur, Kembre hag Iwerzhon. E-touez e ziskibled e kaver sant Kongar. Echuiñ a reas e vuhez war Enez Von nepell diouzh lec'h m'edo sant Seiriol e vignon.
- Sant Selev pe Selevan, tad sant Kebi hag ar sent Paolan, Maeleg, Libiav, menec'h, diskibled sant Kebi.
- E 640, sant Tesiliav pe Suleg (Kb. Tysilo), tiern e Bro-Gembre, abad Meifod e bro Trefaldwyn (Montgomery), marvet e manati sant Sulian.
- E 1308, ar gwenvidig Yann Duns Scott, breur minor, doueonour. Ganet e Bro-Skos, e voe kelenner prederouriezh ha doueoniezh e Cambridge, Oxford, ha Kolun en dibenn. Mestr brudet evit e spered lemm hag e c'hred esmaeus e varvas d'e zaou vloaz ha daou ugent o lezel un oberenn fonnus-meurbet.

